


# HEKLEV SEVENADUREL

|  |                    |    |
|--|--------------------|----|
|  | A-dreuz lenn       | 2  |
|  | Petra nevez ?      | 7  |
|  | Notennoù           | 17 |
|  | Roll pennadoù 2023 | 24 |

Herve LATIMIER

**Vichy France, Old Guard  
and New Order,  
1940-1944,**  
gant Robert O. Paxton,  
Columbia University Press,  
2001,  
476 pajenn, \$37



Unan eus al labourioù pouezus o deus cheñchet ar sell war mare ar “*Révolution Nationale*” e Frañs eo oberenn Robert O. Paxton ; echu gant teoriennoù ar “c’hoari daou du” hag hini ar c’hleze (De Gaulle) hag ar skoed (Pétain), ar wirionez war emzalc’h ar C’hallaoued e-keñver ar ren hag e gemmoù ; ar politikerezh enep-juzev hag

an emzalc’h e-keñver Bro-Ala-magn.... En e rakskrid « *Introduction to the 2001 Edition* » hag en « *The Bibliographical Note* » en dibenn e veneg Paxton ar pezh en deus desket abaoe an embannadur kentañ (1972) hag an holl levrioù bet embannet abaoe war an danvez. Pemp chabistr a gaver en oberenn : « *The French Quest for*

*Collaboration, 1940-1942* » ;  
 « *The National Revolution* » ;  
 « *The Collaborators* » ; *Collaboration - 1942-1944 : Between Liberation and Revolution* » ;  
 « *A Balance Sheet : The Legacy of Vichy* ». Diaezet eo an dielfennadur war ur bern dielloù ne oant ket bet implijet a-raozañ, re alaman dreist-holl rak ne oa ket tu c'hoazh da welet pep tra eus tu Frañs. Gouarnamant Pétain o klask un emglev gant an Trede Reich o kinnig sikour anezhañ a-enep d'ar Saozon a-drugarez da arme an arsavbrezel, ar morlu peurgetket hag

an trevadennoù, hep disoc'h. Tu forc'hellek ar renad : eus un tu un ideologiezh (distro d'an douar, relijion, familh, proviñsoù...) embannet, eus un tu all teknokrated kreizenner a fell dezho profitañ eus ar prantad evit modernaat Frañs, kalz kreñvoc'h e gwirionez. Ar stummoù disheñvel a “genlabour”. Niver an divizoù bet kemeret gant an *État Français* hag a zo chomet goude ar brezel gant ur gwiskamant nevez. An holl grafoù-se hag ur bern re all a gaver dielfennet en oberenn. Ul levr a bouez.

**FLANCHEC,**  
 gant Jean-Michel Le  
 Boulanger,  
 Éditions Goater, 2022,  
 473 pajenn, 13€



Kinniget eo an oberenn-mañ evel ur buhezskrid ha bez' eo. Santet e vez en deus an aozour graet ur gwir labour istorour gant niver an dielloù hag an daveoù resis a zo diazez ar skrid. Ober ul labour istorour na vir

ket a skrivañ en un doare plijus ha buhezek. Lennet 'vez istor Daniel Flanchec evel ur romant. Ali Mona Ozouf a gaver war golo al levr a gadarna ar sell-se. Tregeriad deuet da vezañ eil-maer komunour Douar-

nenez goude Sébastien Velly bet dilennet e 1921 hag aet da Anaon e 1924. Mab un amunizer sakrist, deuet da vezañ un anarkour taer, tremenet dre an SFIO a-raok dibab an Trede Etrebroadel e 1920 ; bet mignon da Jacques Doriot... Prezeger dreist, skriddaelour a-feson, kaner... Gwelet evel un haroz gant micherourezed ar friturioù evit e roll e-pad an harzoù-labour bras e 1924-25 dreist-holl goude ma voe bet klasket drouklazhañ anezhañ e penn-kentañ 1925. Bet eo ur maer efedus daoust d'e zoare mestr da ren an traoù. Diskuliet d'an Alamaned gant e wreg, "ar gontez", ha kaset da vBuchenwald ma voe lazhet en ur stumm a chom c'hoazh un tamm misterius. Ur gwir dudenn romant gant ur vuhez leun a stourmoù, hag a zarvoudoù lies-seurt, politikel ha personel gant tuoù sklaer ha tuoù teñval. Setu ar pezh a lâr diwar e benn Jean-Michel Le Boulanger e penn-kentañ al levr : « *Flanchec a vécu à hauteur d'homme, avec élans de grandeurs, avec petitesse aussi. Plus grand que lui quand il se dresse devant les puissants, voix de ceux qui en sont privés. [...] Mais il est plus petit que lui parfois, rabougri, tout ratatiné,*

*quand l'argent le corrompt et le rend vulnérable. Oui, un drôle de bonhomme...* » Pevare embannadur ar buhezskrid eo hemañ. Berzh en deus graet abaoe 1997 eta. Aliañ a ran lenn an oberenn evel-just. Titouret mat ha leun a vuhez. Ouzhpenn buhez Daniel Flanchec e taolenn buhez politikel ar mare, hini an tu kleiz pellañ peurgetket, e Breizh hag e Frañs. Desket e vez ur bern traoù.

Hegazet on bet gant un draig koulskoude. Lâret em eus da Jean-Michel c'hoazh. Seblantout a ra bezañ fachet gant ar realioù. Treiñ « pemp real a vo » gant « *cing sous* » zo souezhus. Du-mañ « *un sou* » a oa ur gwennek (pemp kentim) hag ur real pemp gwennek (25 kentim). 5 real a ra ul lur (pevar real) ha 25 kentim eta (An Here p.1094). P.147 e komprenner o deus bet ar micherourezed ul lur an eur e-lec'h 80 kentim hervez an aozer. Ouzhpennañ a ra : « *Oh, certes, les "pemp real a vo" ne sont pas atteints.* » Reizh e seblant an traoù. Met un notenn a luzia pep tra c'hoazh rak komz a reer bremañ eus 80 kentim mui ar pemp "gwennek" gounezet (1,05 lur ar wech-mañ). Kerzh da gompren...

**Une République à  
bout de souffle,  
gant Fabien Escalona,  
Le Seuil, 2023,  
54 fajenn, 4,50€**



Berr eo al levrig-mañ. Poue-  
zus memes tra evit ar re a soñj  
dezho ez eo tremen poent  
cheñch aozadur ar Republik  
c'hall. Diskouez a ra sklaer ne  
glot ket ken ur sistem bet save-  
teet e-kreiz un enkadenn boli-  
tikel don (brezel Aljeria) gant ar  
saviad a-vremañ. Aet eo ar  
“parlamantouriezh heboellaet”  
en-dro pe dost e-pad ur mare  
evit abegoù liesseurt. Bez' e  
c'heller menegiñ ar c'hoant da  
guitaat “dizurzh” ar IV<sup>re</sup>  
Republik, prantad ekonomikel  
an “tregont bloavezh gloriüs”,  
ar fed e oa brasañ niver kambr  
ar gannaded eus tu ar prezidant.  
Div wech a dleas ar prezidant  
ober gant ur brasañ niver ne oa  
ket eus e du. Klasket e voe  
mirout eus an dra-se da c'hoar-  
vezout o lakaat respet ar parla-  
mant hag hini ar prezidant da  
glotañ. N'eus an dra-se graet  
nemet gwashaat an traoù.  
Gwelet a reer mat n'eo ket ar

sistem graet evit an treuzem-  
glevioù abalamour da c'hallou-  
doù dreist vuzul ar prezidant.  
Ur vonarkiezh republikan eo ar  
galloud jupiterian. An hengoun  
kreizenner a washa an traoù,  
anat. Gwelet e vez ar prezidant  
oc'h emellout eus pe tra. Nebeut  
a emrenerezh gant ar c'hentañ  
ministr. Pa n'emañ ket ar parla-  
mant eus e du e klask ar prezi-  
dant implijout troioù-kamm  
aotreet gant ar vonreizh evit  
lakaat anezhañ da blegañ. Ara-  
bat bezañ souezhet ma sav forzh  
peseurt kudenn betek ennañ. Ur  
wir enkadenn demokratel a  
vever : kalz a dud ne 'z eont ket  
da votiñ ken ha gellout a rafe ur  
stumm galloud gwaskus en em  
staliañ. Poent cheñch ar  
vonreizh ha reiñ muioc'h a  
c'halloud d'ar parlamant ha  
d'ar strollegezhioù lec'hel.  
Displeget e vez mat ar saviad el  
levrig daoust ma 'z eo treut al  
lodenn diwar-benn an




diskoulmoù... Ma fell deoc'h Fabien Escalona gant Maxime  
gouzout hiroc'h a-raok lenn an Touzé e niverenn 712 *Pobl*  
oberennig, lennit atersadenn *Vreizh* (Mae 2023)...

# PETRA NEVEZ ?



**Herve LATIMIER,  
Malo BOUËSSEL du BOURG**

**Ur sell war al  
liesyezhegezh e  
Mayotte, etre Afrika  
hag Europa,  
gant Morgan Le Barzic,  
Embannadurioù Al Lanv,  
174 pajenn, 15€**



Karibu Maore ! Degemer mat e Mayotte ! Diwar he c'hounskrid he deus tennet Morgan ar Barzhig danvez *Ur sell war al liesyezhegezh e Mayotte, etre Afrika hag Europa*. Gant un tamm mat a ziegi eo em boa digoret he levr. N'eo ket ebat atav al labourioù skolveuriek... Ha gwall bell emañ Mayotte...

Met buan on bet tapet gant ar pezh am eus desket a-fet sokio-yezhoniezh ha gant al liammoù eur pedet d'ober gant stad ar yezhoù e Breizh ur c'hantved zo bet. Ul levr awenus he deus savet Morgan ar Barzhig.

Rak n'eo ket bet dilezet he sorc'hennoù hag hec'h alba-c'hennoù gant ar Stad C'hall :

enframmañ un tiriad nevez er Republik unan ha dirannus (101<sup>vet</sup> departamant Bro-C'hall eo Mayotte abaoe 2011) dre zistrujañ ar yezhoù lec'hel evit brasañ mad ar galleg. Met gant ar peder yezh pennañ a vez pleustret e Mayotte e vez roet plouz da chaokat d'ar velestradurezh... Dre gaer pe dre heg en deus graet e soñj Rektora an enezenn ober (dousik-dousik) gant an teoyezhoù, hag a zo yezhoù-mamm al lodenn vrasañ eus ar boblañs e Mayotte. Met evel yezhoù skoazell, kement hag aesaat kelennadurezh ar galleg. Yezhoù ardreuzat, tra ken. Ur bazenn war-raok hep ket a var, lusket gant ur pal gaouus avat : lakaat ar galleg da drec'hiñ ha da ren. Unyezh ar Republik, yezh ar berzh sokial, yezh an dazont, yezh ar vodernelezh, yezh ar gouiziegezhioù... Ur bater ha n'eo ket dianav deomp...

Pevar rann a ya d'ober al levr : ur sell-tro war an enezenn, e-mesk enezeg Komor, hec'h istor e-kreiz ar meurvor Indez, diseurtelezh he sevenadur, doa-reoù an enkadenn a ra e reuz du-hont, ur studiadenenn war al liesyezhegezh hag an diglosiezh e Mayotte, un dielfennadur eus

an Deskadudezh-Stad e Mayotte hag e levezon war ar yezhoù lec'hel, hag erfin ur sell war amzer da zont ar yezhoù e Mayotte. Maoriz o deus votet evit chom e-barzh Rebrelik Bro-C'hall, p'en doa ar peurrest eus enezeg Komor dibabet ar frankiz e 1974. Alese enebiezh Mayotte ouzh Komoriz all an enezeg, hag ur stad dibar dindan lezennoù ar Republik.

Daoust m'eo paour ar Vaoriz, pinvidikoc'h ha gwarezetoc'h ez int eget Komoriz. Dre-se e komprenner penaos en deus departamant Mayotte da dalañ ouzh un enbroañ diroll ne zeu ket a-benn da verañ. Ken ez eo reuzeudik ar vuhez war an enezenn. N'eo ket kudenn ar yezhoù an hini gentañ e penn an annezidi p'en em c'houlennont war ar pemdez : « Petra debriñ ? Petra evañ ? Penaos kaout dilhad da wiskañ ? Penaos kaout paperioù gall ? Penaos kuitaat Mayotte ha mont d'ar Reunion pe d'ar metropol ? Penaos achap eus etre daouarn ar polis ?... » Bezañ ma chom tomm o c'halon ouzh o yezhoù (shimoreeg, shibushieg, arabeg...), n'int ket prest da stourm evit goveliañ ar binvioù ret evit o zreuzkas. Hgozik mut e chom Morgan ar




Barzhig war ar pezh a c'hallfed envel "Emsav" e Mayotte. Ha setu m'emañ ar galleg o c'hounit tachenn e-touez ar re yaouank. Ha padal, bezañ mennet da vestroniañ ar galleg ne dalvez ket o dije divizet an dud disteurel

o yezh-vamm. Roget-diroget e vez Maoriz etre meur a fealded. Met gwall deñval e vo dazont o yezh, ma kredont e vo graet al labour saveteiñ gant ar Stad C'hall.

Mb dB

**Plac'h ar C'hornôg,  
*La fille de l'Ouest*,  
AEB embannadurioù  
124 fajenn, 10€**



An danevelloù a lenner e dastumad *La fille de l'Ouest/Plac'h ar C'hornôg*, a oa bet kinniget gant un toullad aozerien eus ar vro da-geñver ur genstrivadeg bet aozet gant *Kevredigezh Skrivagnerien Breizh* bloaz zo. En tu all d'an tem, a oa ur redi sevel an danevelloù diwarnañ, e oa pedet an aozerien da skrivañ en o frankiz, diwar o ijin dezho, e galleg, e brezhoneg pe e gallaoueg. Unnek danevell zo bet kinniget e galleg, seizh e brezhoneg ha div e gallaoueg. Sed un eostad fonnus neuze, liv an taol-arnod war lod eus ar

skridoù, pa zeuont dindan bluenn skrivagnerien glas o begel moarvat, ha liv ar vicher war testennoù all, savet gant aozerien arroutet. Artificiel e c'hell bezañ plantañ un dodenn, dre ret ha diouzh an diavaez, en dezrevelloù, ken e chom lod eus ar skridoù war-c'horre. Tu fall nep kenstrivadeg tematek eo. Met arabat disoñjal an tu mat : lakaat pluennoù nevez, liesseurt ha liesliv, d'en em ziskouez evit klask o chañs.

C'hoant ganin menegiñ « Rouanez dibaper 1957 », gant Bernez Géry, a gont istor ur

Vreizhadez kozh kollet e Fontenay-le-Comte, ha kaset d'an archerdi, m'en em gav en he bleud o kontañ kaoz e brezhoneg gant ur c'habiten genedik eus Treger-Izel, evelti. « Goust ar c'hraoaù-garzh », gant Anaïs Le Ruyet-Mahé, a zo itriket brav ivez. Kas a ra al lenner d'un dibenn dic'hortoz, leun a fent dous-c'hwerv. « Ur sklaerenn war an aod » a venegin

c'hoazh, gant Christelle Chevalier-Gaté. Berr ha kevrinus. Erfin, a bep seurt zo, a-fet temoù koulz hag a-fet stiloù, deuet brav pe vravoc'h gant hon ugent skrivagner ha skrivagnerez. Klaoustre e kavo pep hini e blac'h ar C'hornôg dezhañ er stal vrikailhet-se...

MbDb

**Geriadur teiryezhiek ar  
beajoù, brezhoneg-  
galleg-saozneg,  
gant Marsel Modir  
Embannadurioù Stang Alar,  
70 pajenn, 10€**



N'emañ ket Marsel Modir war e dro gentañ gant ar c'heriaoueg-mañ. *Geriaoueg teiryezhiek ar beajoù* a zo ar seizhvet hini, ma kontan mat. Bewech e vez dibabet temoù pleustrek-kenañ gant an aozer, kement ha degas un tamm skoazell da Yann vrezhoneger, kozh pe yaouank, er vuhez pemdeziek : an ti, ar c'horf, ar velestradurezh... Gant ar beajoù emamp ar wech-mañ. C'hwezhek dodenn a ya d'ober ar c'heriaoueg, deoc'h da vezañ en ho pleud pa foetoc'h bro gant un tren, ur c'harr-nij, ur

c'harr-tan, ur garavanenn, ur marc'h-houarn pe war droad... Ezhomm ho po, meur a wech, eus *dave hoc'h amberz / la référence de votre réservation / your booking reference*. Ma veajit dre garr-nij, na c'hwitit ket war an eur dibenn enrollañ, ha deuit gant ho kartenn-lestrañ. Pa les-troc'h, taolit ur sell prim ouzh an dorioù-tec'hout e kenkaz. Dibabet hoc'h eus ul leti, un dachenn-gampiñ, pe ur c'harr-kampiñ, pep tra a zo displeget deoc'h dre ar munud, gant geriennoù en teir yezh ha gant

tresadennoù resis ha dik. Evel-just, n'en deus ket disoñjet Marsel Modir an dafar kehentiñ : Amkanell, Goustilh ha kartenn memor... Kollet oc'h ? Grit gant unan eus an teir menegva a gavoc'h e fin ar c'heriaoueg. Ul

labour plijus ha talvoudus neuze.

Ma ne gavit ket al levr-se en ho stal levrioù e c'hellit skrivañ da *Embannadurioù Stang Alar* : symimosa2@yahoo.com.

MdbB

**Prefixes & suffixes,  
le breton au beau fixe,  
gant Emile Granville,  
Embannadurioù ar Peniti,  
248 pajenn, 15€**



Penaos ober e dreuz e janglenn rakgerioù ha lostgerioù ar brezhoneg ? Pinvidik-mor ez int ha resis-kenañ peurvuiañ. Peadra da c'hoveliañ gerioù nevez a glot gant ezhommoù puilh ar vuhez kempred. Re vuan e tamaller ouzh an nevezc'herioù bezañ blaz ar brezhoneg chimik warno. Ha koulskoude, pa reer un tamm furchadenn dre bajennoù ar C'hatolikon e teu anat n'eo ket trubardiñ spered ar brezhoneg ober gant teñzor ar rakgerioù hag al lostgerioù a vez profet deomp gant hor yezh : marc'had, marc'hadour, marc'hadourez, marc'hadou-

rezh, marc'hata, marc'hallac'h... adkaret, arc'hbeleg, divarrañ, gouziviad, gourfaoterekaat, leztad, liesfurm, peurabilañ, ha me 'oar-me... Eus unan eus barregezhioù dibar ar brezhoneg ez eus kont neuze.

Perak, eta, e vez sellet ouzh an deveradurioù rakgerel ha lostgerel gant kement a zisfiz ? Peogwir ne vezont ket anavezet mat. Se eo ar pennkaoz moarvat. Ne vez ket kenteliet war an hir implij ar rakgerioù hag al lostgerioù pa verzer o teskiñ brezhoneg. Un dek pajennad bennak a vez gouestlet dezho gant yezhadur Favereau, c'hwec'h pajen-

nad gant hini Chalm, un tammig muioc'h gant Kervella en e *Yezhadur bras...* Ne vefe ket ouzhpenn deomp, koulskoude, deskiñ an diforc'h a zo etre *paderezh*, *padelezh* ha *padusted* (p.95).

A-hend-all, n'eo ket stabilaet implij lod eus an deveradurioù. Diskouez a ra Emile Granville penaos ez eus teir gerienn evit *transsubstantiation*, peder evit *osmose*, c'hwec'h evit *metempsychose* (p.92). Diaes ober un dibab reizh... Skrivagnerien zo, a zo gwashoc'h, a ra gant deveradurioù amploc'h eget justoc'h. Ken e teu al lennerien da vezañ heuget gant an nevez-c'herioù.

Abegoù sokioyezhoniel a zo ivez. Bevañ a ra ar brezhoneg en ur stad a ziglosiezh don. Furoc'h eo neuze, mare-mare, diouzh a soñje Roparz Hemon, ober gant gerioù etrebroadel brezhonekaet, gresian pe latin o gwrizioù, kement ha bezañ komprenet gant al lodenn vrasañ eus ar vrezhonegerien. Kavout un hent etre, aze emañ an dalc'h. Poellekoc'h hag efedusoc'h. *Divoder* a glot gant *dister*. Mat eo gouzout moull da bep tra.

N'eus nemet dre en em voaziañ ouzh talvoudegezh hag

ouzh implij hor sistem deveriañ e c'hellimp tennañ hor mad eus e binvidigezh. Ar raktres-se, hep ket a var, a oa war spered Emile Granville p'en deus savet e studiadenñ hir ha klok diwarbenn ar rakgerioù hag al lostgerioù e brezhoneg. Deomp eo, bremañ, da vont e-barzh ha da studiañ a-zevri. Ur benveg a-feson a zo en hor c'herzh.

N'on ket barrek a-walc'h evit barn live skiantel labour Emille Granville, tud all a raio moarvat, met sur on memes tra ez eo a bouez e labour evit kavout e hent e janglenn an 245 rakger ha 120 lostger en deus studiet e-korf 248 pajennad e levr. Pa lavaran janglenn ez on direizh. Rak unan eus perzhioù heverk e labour eo ar sklaerded. Strivoù en deus graet evit ma vefe aes kavout ar pezh a glasker. Renket en deus ar rakgerioù hag al lostgerioù dre demoù. Triwec'h chabistr/dodenn zo neuze : *position*, *quantification*, *action*, *négation*, *dépréciation*... Evit kement rakger pe lostger zo, e tispleg an orin, an dalvoudegezh pennañ hag an arlvioù gant skouerioù niverus, an nevezc'hrerioù savet diwar an deveradur-mañ 'n deveradur, ar c'hemmadurioù,

ha gwezhioù zo, diouzh ret, e kinnig ur rannbennad breud (*Discussion*), ma ro e soñj an aozer. Evit pouezañ war ar bedagogiezh en deus ouzhpennet Emile Granville, e talbenn pep pennadig, un treslun<sup>1</sup> eeun evit skeudenniñ talvoudegezh an deveradur. Ur dra nevez eo evidon, ha kavet em eus e oa ur gwir skoazell meur a wech.

1 Treslun : piktogramm... deoc'h da choaz.

*Préfixe & Suffixe* a zlefe bezañ unan eus binvioù diazez nep brezhoneger kar e yezh da'm soñj, e-kichen *Geriadur brezhoneg An Here*, geriadur Martial Ménard, *Yezhadur bras Kervella*, geriaoueg Termofis, hag evel-just geriadur godell *Al Liamm*<sup>2</sup> !

MbdB

2 Nouveau Dictionnaire Breton/ Français, Français/Breton

**Eun Ermid-peizant,  
Un ermite-paysan,**  
gant Jean Daniel,  
brezhoneg gant Job an Irien,  
Minihi Levenez,  
67 pajenn, 5€



Ur skridbuhez uvel zo eus an destenn verr-mañ. Job an Irien eo en doa goulennet digant e vignon Jean Daniel, en doa graet anaoudegezh gantañ en Abati Landevenneg, sevel un destenn a-zivout hent kredus-diskredus ar feiz, buhez un den a-ziwar ar maez, bet ganet er Vro-Vigoudenn e 1941, deuet da vezañ ermid-peizant, un

tammig e-giz ar veleien viche-rourien ur mare zo bet. Desket em eus, dre-se, ez eus ermided estreget en dezerzhioù grizias, en inizi distro hag er menezioù digevannezus... Hoc'h amezeg, piv 'oar...

E-mesk an natur e kav Jean Daniel e beoc'h abaoe an amzer ma veze oc'h ebatal gant e seizh breur hag e ziv c'hoar : « Hor



c'hoarioù a oa an douar, an dour, ar wezenn, an tan. » Santout a reas ur galv e 1963 : « A-benn ur frapad, o veza ma hir-zoñjen war va buhez rouestlet, e oe 'vel ma kouezfe ennon eur plañchot, en em gavout a ris en ul live kalz donnoc'h, hag aze ne oa nemet karantez. » Ar “Prezañs Vraz” a anavezase neuze, war roudoù breur Marcel, un penitiour eus *La Pierre qui Vire*, a oa e bal « dond da veza bedenn. »

Tremen a reas Jean Daniel eus un abati d'eben, oc'h ober « troiad an ermited », e-giz ma ra kompagnuned an dever, kent dont da vezañ penitiour e-touez e re, peizant e-mesk ar beizanted, prest da vanifestiñ ganto diouzh ret ! Liammoù a vignoniezh en deus skoulmet Jean Daniel bep ma 'z ae gant e hent. Kejet en deus gant teologourien ha prederourien liesseurt, o deus temzet e vuhez speredel ha krefredel, Jacques Maritain en o zouez. Hennezh en em gavas gantañ e Tolosa, ma oa o vevañ e ti Breudeur Vihan Jezuz e fin e vuhez.

Met n'eo ket an darvoudoù nag an degouezhioù, nag ar mennozhioù zoken, a ra talvoudgezh *Eun Ermid-Peizand*. An

aergelc'h speredel ne lavaran ket. Pajennoù brav en deus skrivet war an hirsell, war *noche oscura* an douetañs en deus treuzet, war e vamm, war ar gwez, war ar saout... « An natur a ehanas da veza evidon eun dra da arvesti, dond a reas da veza an êr a alanen. »

Ur plas bras en deus roet da glad ar vro ivez. Brezhoneger a-vihanik eo Jean Daniel. « Or mad kenta eo ar yez : epad an eiz bloaz m'am eus bevet dindan ar memez toenn ha va mamm, ha beteg ar fin, e kozeem an eil d'egile e brezoneg. [...] Abaoe m'on en em lakaet d'ar brezoneg gand va c'henvroad manac'h, ez-eus darempredou gwiroc'h etrezom. »

MbdB

**Les Innocents,**  
gant Mahir Guven,  
Grasset,  
492 pajenn, 24€




Goude bezañ lennet pennad Maiwenn Raynaudon-Kerzerho anvet « *Mahir Guven, L'innocence d'un petit breton* » e nivrenn 190 (Here 2022) *Bretons*, em eus bet c'hoant da lenn al lev. N'on ket bet dipitet. Plijus ha buhezek eo an doare m'eo skrivet. Un toullad bloavezhioù eus buhez krennarded eus Saint-Sébastien-sur-Loire (Saint-Sebastian-an-Enk) e bannlev Naoned. Darempredoù gant ar skol hag er skol, darempredoù gant ar grennarded all, darempredoù etre paotred ha merc'hed, saviad sokial an dud, politikerezh, darempredoù etre kumuniezhioù a orin disheñvel, sekredoù familh. Met ivez klask e identelezh : mab ur stourmer dizalc'her breizhat eo Noe, an dudenn benañ. Aet eo e dad da Anaon ha den na lâz dezhañ penaos na peseurt den e oa. Kurd eo e wellañ mignon Gabriel... Kavet e

vez kalzik daveoù d'ar strollad Emgann ha zoken d'ur stourmer resis bet harzhet goude ma voe laeret danvez tarzh e Plevin : « — *T'as vu qu'ils ont arrêté Gaël aussi pour Plévin ? — Le p'tit Gaël* » p.358. Empatiezh en deus an aozer evit an darn vrasañ eus an tudennoù. Plijusoc'h a se al lev. Aliañ a ran lenn anezhañ...

HL

**La frontière bretonne,**  
gant Benjamin Keltz ha  
Philippe Créhange,  
tresañ gant Eudes,  
Coin de la Rue,  
224 fajenn, 23€



Al levr-mañ zo un enklask kelaouennerezh a-zivout kudenn distro departamant Liger -Atlantel da Vreizh. An daou skrivagner a zo kelaouennerien a-vicher ha labouret o deus hervez reolennoù ar gelaouennerezh, o tegas prouennoù hag o wiriañ mammennoù o zitouroù. Istor, atersadennoù, dielloù : peadra da vezañ kelaouet mat war un teuliad hirbodus. Kinniget eo an oberenn e stumm bannoù-treset. Un doare a gaver mioc'h-mui. Buheze-

koc'h, aesoc'h da lenn eget ul levr klasel ha ken sirius all. Gwelet e vez kalz tud anavezet gant hol lennerien. A-wechoù ne gaver ket anezho treset ken mat hag a vefe c'hoant met diskouezet e vez sklaer piv int. Ul levr da lenn ha pa gredfer anavezout an traoù ha da ziskouez d'ar re n'anavezont ket pe a gont traoù hep prouenn. Da gaout en e (he) levraoueg...

*HL*

## HOR MIGNONED

D'an 18 a viz Kerzu, e Brusel, eo ganet Koupaia e ti Gwenn  
Guillaumie ha Stéphane Dresse, ur verc'h-vihan da Evelyne Raoul  
ha Laorañs Guillaumie. Degemer mat dezhi !

## PROFOÙ

Miz Kerzu : Paskal TABUTEAU ; Jean-René LE MOULLEC ; Jean-Yves KALLAG ; Madalen AN AMOUR-LE GUILLARD ; Fulup KADORED ; Pol Yvon VIROT ; Gérard ROLLAND ; Yann VERNEY ; Jean-Luc TERROM ; Louis BODIVIT ; Patrick CADOREL ; Florence ha Rodolphe COSQUER-BLANCHARD ; Jañ-Mai DRAPIER ; Gildas LE BIHAN ; Christian LE GOFF ; Michel LE HIR ; Daniel PETON ; Eric PIANEZZA-AR PACH ; Evelyne RAOUL-GUILLAUMIE ; Christian ROGEL ; OUESTELIO

— War un dro : 1261€

Miz Genver : Jorj ABHERVE-GWEGEN ; Yvon ABIVEN ;  
Riwal HUON ; Anna LE GOFF ; Gwenole BIHANNIG ; Yves-  
Marie LE MORVAN ; Hervé RENAN ; Mikael BERTIN ; Loig  
KERVOAS ; Gireg & Marivon KONAN ; André LE DEROFF ;  
Herve CORBEL ; Mikael BRIANT ; Herve POENS ; Jean-Louis  
BUSSON ; Lukian KERGOAT ; Jean-Paul LEBLAY ; Tudual  
AUDIC ; Elisabeth LE FEUVRE

— War un dro : 340€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn  
d'hor skoazellerien.*

## LIZHIRI

---

### *Digant Fulup Lannuzel*

Kemer a ran tro eus an tamm lizher-mañ ivez evit titouriñ  
deoc'h un droienn ha na gavan ket reizh, e niverenn 460, p.64 l.1 :

**An tra-mañ-tra** : ouzhpenn ar vi-kougoug a zo e pennlizherenn  
ez eo **An dra-mañ 'n dra** ar stumm reizh. Mui-ouzh-mui e kaver  
seurt implij, pe traoù all evel **poent-mañ-poent, den-mañ-den**,  
hep ar ger-mell en deroù ha hep ar ger-mell berraet en dibenn,  
moarvat dre levezon an droienn poent **pe** boent, tra **pe** dra.  
Koulskoude eo bet disklêriet fraezh ar gelennadurezh gant meur a  
hini :

Gant Yann Gerven :

Kentelioù yezhadur B36 (war ar genrouedad : Lexilogos breton)

Evit treiñ ar galleg *tel ou tel* ec'h implijer an droienn : an...-mañ  
'n... : **An dra-mañ 'n dra, al labour-mañ 'l labour, en amser  
man han amser** (Bzhg krenn).

Notenn : Evit ar re a skriv eo dav soñjal e vez lonket ar ger-mell  
e Kerne alies, en un doare sistematek en-dro da Skaer zoken, setu  
e vez klevet **den-mañ den** eno, mes muioc'h en Nord e vo klevet  
**an den-mañ 'n den**, ha gwelloc'h eo moarvat skrivañ ar stumm

ledan. Er memes mod e vez klevet **evit poent** e traoñ Kerne, mes **evit ar poent** en Nord da Venez Are.

Gant Frañsez Kervella, *Yezhadur Bras ar Brezhoneg*, p.509 :

**Mañ** a c’houlenn bezañ lakaet atav etre daou c’her divizet mat (gant ar ger-mell-strizh dirazo, an eil a verra neuze en ‘n, ‘r, pe ‘l) :

**An den-mañ-’n den, ar c’hi-mañ-’c’hi, el lec’h-mañ-’l lec’h, an dra-mañ-’n dra.**

Gant Roparz Hemon en e *Yezhadur Istorel ar Brezhoneg*, embannet gant Hor Yezh, p.146 notenn 5 :

Ar rannig-diskouez **man ; mañ** a c’hell bezañ arveret ivez : **an droug ma’n droug**, IN. (c. 1709) p.307 ; **en amser m’an amzer** ibid. ; **an deiz-man-deiz** MBR. (1870) p.316 ; **an dra-man-dra** JKS. (1862) p.50.

Anat eo diwar an holl skouerioù-se ez eo faziek an troiennoù hep an daou c’her-mell. Gant-se n’eo ket mat ar skouerioù a ginnig *Geriadur Brezhoneg* An Here p.885, ma kaver **an dra-mañ-tra, ar wezenn-mañ gwezenn**, tennet eus *Geriadur Gregor Rostren* (1732) moarvat, gant an eil lodenn hep ar ger-mell, neuze hep kemmadur. An darn vrasañ eus ar skouerioù all a zo gant ar stumm klok, ar re goshañ en istor ar yezh ivez. Mat e ve d’an holl a ra gant ar brezhoneg mont diouzh ar stumm reishoc’h.

## **KENSTRIVADEG TI AR VRO KEMPER 2024**\_\_\_\_\_

Kregiñ a ra ar bloavezh 2024 gant lañs an trede kenstrivadeg danevelloù e brezhoneg. Ti Ar Vro Kemper a ginnig ur gejadenn digoust a c’hello kemer perzh enni, skolidi, skolajidi, liseidi hag an dud en oad evit eztaolañ diwar-benn tem « Ar c’hoarioù olimpek ». Ar skrid, 7 500 arouezenn dezhañ d’ar muiañ (evit ar skolidi) ha 10 000 arouezenn dezhañ d’ar muiañ-tout (evit ar skolajidi, al liseidi hag an dud gour), a zo da vezañ kaset d’an diwezhatañ d’ar Yaou 29 a viz C’hwevrer 2024, a-raok hanternoz, dre bostel, d’ar chomlec’h : [contact@tiarvro-kemper.bzh](mailto:contact@tiarvro-kemper.bzh).



Palioù ar genstrivadeg :

Fellout a ra da Di Ar Vro Kemper lakaat war wel an hiniennoù hag o mennozhioù war ar bed, en ur vodañ ar vrezhonegerien en ul lusk boutin a grouidigezh lennegel. Skrivagnerien ha skrivagnerezed a-gozh pe a-nevez a zo broudet da ziskouez braventez ar yezh er stumm a blij dezho.

Dre an obererezh ijinañ-se e klask Ti Ar Vro Kemper ivez lakaat al lenn war wel, evel ma ra bep miz o pediñ ur skrivagner pe ur skrivagnerez er Bodad Lenn evit eskemm diwar-benn o oberennoù en un aergelc'h birvilhus. Bez' e vez ivez ar pal desachañ evezh an ensavadurioù war al labourioù graet evit ar sevenadur lec'hel, pinvidik ha liesliv.

Ar bodad barn a stroll gwazed ha maouezed a bep oad. Raktreset eo cheñch anezhañ bep bloaz, evit lakaat er jeu perzhidi liesseurt ar vuhez lennegel, ha ne vern nag an oad, nag an orin, nag ar jener.

Roet e vo ar prizioù evit an danevelloù dalc'het d'ar Gwener 29 a viz Meurzh 2024, da 10e vintin, e Mediaoueg Alain-Gérard, Reper Julien Gracq 29000 Kemper.

Reolennaoueg ar genstrivadeg a gaver war lec'hienn internet Ti Ar Vro Kemper : [tiarvro-kemper.bzh](http://tiarvro-kemper.bzh).

*Darempredoù ha titouroù : Ti Ar Vro Kemper - 3 Leurenn  
Familh Gabai - 29000 Kemper  
contact@tiarvro-kemper.bzh  
02 98 90 70 43*

## MANIFESTADEG DIWAN

---

Ouzhpenn mil a dud o deus kemeret perzh en emgav-se e Sant-Brieg. Setu ar c'hemenn a oa bet kaset ha skignet evit gervel ar Vretoned.

« Cheñchet eo muiañ-niver departamant Aodoù-an-Arvor e miz Even 2021 hag en em gavet omp hiziv da greiz ar respet setu eo poellek en em soñjal war ar politikerezh yezh evit ar brezhoneg.

Daoust d'ar steuñv bet votet ne ya ket war-raok : n'eus bet nemet un emvod abaoe an dilennadegoù ha n'eo ket bet erlec'hiet c'hoazh ar c'hargiad a rae war-dro ar brezhoneg.

Gwall wan eo politikerezh yezh an departamant ha skouerioù liesseurt a zo. Da gentañ penn ne oa den ebet da zileuriañ Kuzul departamant Aodoù-an-Arvor d'ar *Conférence territoriale de la langue bretonne* 'lec'h m'eo bet kinniget gant rannvro Breizh ar « Steuñv adperc'hennañ ar yezh ».

Daoust d'an departamant bezañ ezel dre wir eus Kuzul-akademiezh ar yezhoù-rannvro (KAYR) ne vez ket gwelet kennebeut, setu ne vez ket amañ da harpañ goulennoù kevredigezhioù ar familhoù evit astenn ar c'helenn divyezhek er skollajoù publik, padal eo kreiz e gefridi.

Splann eo an diouer a souten da skolaj Diwan Plijidi, an enebiezh d'un adskolaj e Perroz zoken hag ur skoazell arc'hant da gefridioù sevenadurel ar rouedad na gresk ket pa gresk an dispi-gnoù-ret.



Emañ ar c'huzul departamant e Kuzul-merañ Ofis publik ar Brezhoneg hag e berzh e-keñver arc'hant a zo an izelañ eus departamantoù Breizh melestradurel, ha n'eus ket peadra da arc'hantaouiñ ur post leun amzer.

